



CANTIC SPIRITUEL

*Var sujet ar Brinces Judith, pehini a
zibennas Holofernes, Roue au Egypt,
dirac kær Bethuli.*

Var ton Santez Genovefa.

PELL bras so em boa bet esper
Da implija lod va amzer
Da ober ur c'hantiq breton,
Agréabl da bobl ar c'hanton.

Rac-se e meus sonjet erfin
E vije util d'am dessin
Trêi a c'hallec e brezonec
Un Histor gaer a meus cavet.

Speret Divin hac adorabl,
Bezit em andret favorabl;
Guerc'hes santel, va sicouret
Da zisclêrya d'ar Vretonet.

Clêvet oc'h eus comz alies
Eus ar Roue Holofernes;
Un den cruel e voa meurbet,
Gant ur plac'h e voe dibennet.

Sonjal eure dre e buissanç
Ober d'ar bobl en assuranç
E adori evit Roue,
Ha memes evit o Doue.

Mæs ar bobl eus a Israël
O veza da Zoue fidel,
Ne felle qet dezo suji,
Ma clasqas dont d'o zistruji.

Prepari eure un arme,
Ma voa General varneze,
En esper dont d'o massacri
Dirac ar guær a Vethuli.

Ar bobl-mâ, fidel d'e Zoue,
A brepar ive un arme
Evit sonjal en em difen
Rac aoun demeus e vourrevien.

Ur brinces gaer, hanvet Judith,
O veza e qær Bethuli,
A laqas choas da Gommandant
Alchior, dre m'oa den vaillant.

Laqet e voe da Goronal,
Var arme Israël General,
Petra bennâc n'oa qet Christen,
En devoa joa ous o lezen.

Me ho lèz da gonsideri
'Ar valiç hac ar jalousi
En doa Holofernes ar Roue,
Pa vel preparèt e arme.

Dont eure e-unan da c'houlen
Ha c'hoant o doa d'en em difen;
Petra voa o lezen, o Doue,
Pa n'oboissent d'ar Roue.

Alchior dezàn a respontas :
Ar bobl-mâ o deus ur feiz vras;
O Doue a so oll-buissant,
Ha Roue eus ar firmamant.

E buissanç a so qer bras,
Ma sicour ar bobl dre e c'hraç;
Hep dale e teui d'ho ranversi,
Mar teuit da glasq e forci.

Holofernes.

Te gomz evel un insolant;
Me rai dre ur gombat sanglant
Dêvi ar guær a Vethuli,
Ha qement den a so enni.

Abars pemp devez hac hirio,
Mar bez beo, te sur a velo
Oun brassoc'h eguet o Doue;
M'o lazo tout abarz neuze.

Alchior.

Allas! pobl paour, mervel so ret,
Holofernes a so fachel;
En em laqit en orêson
Da bedi Doue a vir galon.

D'o zicour d'allout resista

En ur gombat evel houma;
Bras ha bian e ranquer mervel,
Nicun n'en devezo qarter.

Judith.

Va Doue, leun a vadelez,
C'houi ê hon Roue puissant ivez;
Ho pezit sourci ac'hanomp,
Ha quemerit truez ouzomp.

Na souffrit quet, ô va Doue!
Ve ur maleurus a zeufe
A benn da derri ho lezen
Ha da zistruch ar Gristenien.

Grit ma vezint oll punisset
Evel an Egyptianet,
Dre ho justiç hac ho rigneur,
Ha distroit ho pobl dious peb maleur.

Ha possubl ve, ô va Doue!
Ve ur miserabl a zeufe
Da brofani hoc'h Ilisou,
Elec'h ma reomp hor pedennou!

Roit deo ur bunion,
Pa zint qen cruel, qen dirêson;
Grit ma tigoro an douar crenn
D'o lounqa e punç an ifern.

Qen superb eo ar C'haronel,
Ma zeo leun a c'hoad criminel,
Hac e sonch bep hoc'h assistanç
D'hon laza tout nep repetanç.

En e nerz ma e esperanç;
Mes c'houi, Doue, dre ho puissanç
Hac ho craç a ell hon souten,
Ma vezimp fidel d'ho lezen.

O sortial eus e repas,
Permetit, va Doue, dre ho craç,
Pa zeui ar guin d'en antêti,
Ec'h alfen dont d'e zistruji.

Grit ma teuin da veza trec'h,
Daoust peguen fêbl e ve va brec'h,
Da drec'hi e benn d'ar monstr-se,
A fell dezàn beza Doue.

Roit din-me ar gourach-se,
Ha laqit em guinou ive
Comzou qen douç ha qen charmant,
M'en decevin en un instant.

Hep offanç d'am virginite,
Permetit ma rìn va antre,
Ma ellin, pa vezo cousqet,
Trec'hi penn ar monstr milliguet.

Evit ma viot anavezet
Evit Doue partout dr'er bed,
Roue puissant ha general,
Crouer an ên hac an douar.

Va flac'h, ro din va boqedou,
Va farfum, va fandoreillou,
Va habit caer leun a berlez,
Ma zìn da zaludi Holofernes.

Laqit prest er valizen-se
Peadra da veva eiz de
Ebars er c'han gant an arme,
Me raï ar zalud d'ar Roue.

Leqomp en Doue hor fizianç,
M'or c'hunduo dre e brovidanç;
Ne refus e c'hraç da hini,
Pa zeuer gant feiz d'e adori.

Me ho ped, pobl a Israël,
Mar doc'h en ho lezen fidel,
Da c'houlen sicour digantàn
Da resista er gombat-màn.

En em liqit en orêson,
Pedit Doue a vir galon,
Evit ma vimp victorius
Var Holofernes maleurus.

Eliakim, Roue santel,
C'houi oll, Bêleyen Israël,
Gant courach en em gonsolit,
Hac evidomp-ni oll pedit.

Ur veach terrupl antreprenàn,
Evit an oll e partiàn;
Deoc'h tout e lavaràn adie,
En em laqit dirac Doue.

Ar Vêleyen.

Mont a reomp gant ur voez huel
Da bedi an Tad Eternel

D'ho conservi dious drouc-speret.
Er veach oc'h eus antreprenet.

Ho pet sonch ac'hanomp bepret,
Rac tost eo an enemiet;
Judith, ho pet calz a zourci,
Allas! prest voar da gombati.

Santinal an Enemiet.

Pelec'h e zit, Princes yaouanq?
Ho qenet a so ravissant;
Perac ta en em exposi
Da gaout qement all a sourci?

Chom allac'h e paciantet,
Espern ho poan hac ho yec'het;
Evelse n'em brecipitit :
Livirit din petra, glisqit.

Judith.

En em recur a meus sonjet;
Quen terrubl e zon gourdrouset,
Mar clasq ar bobl oc'h insulti,
Ma fell din n'em sovetai.

Me a garfe, hep drouc ebet,
Caout an enor, mar permetet,
Da barlant eus ho Coronal
Holofernes, Roue, General.

Ar Zoudardet.

Ni a yêlo d'ho cundui.
Princes, oll gant hor mousqedi,

Hac ho rento hep drouc ebet
Bete'r C'horonal assuret.

Judiht.

Roue puissant Holofernes,
Rampart an oll binvidiguez,
Me garre em be, emezi,
Ur guinou aour vit ho meuli.

Eus ho Majeste an eclat
A ra din mont quen agreabl,
Monet a ràn var va daoulin
Dirac ho Majeste divin.

Holofernes.

Princes, deut d'en em assuri;
Me ho ped, na grenit mui :
Ho genet e deus va charmet
En instant ma meus ho quelet.

Va daoulagad ha va c'halon
Zo en em ravisset qen don :
Savit prontamant en ho sa,
Me eo, emeza, a dle soubla.

Judith, contit dìn ar sujet
P'evit tra oc'h amâ deuet;
Ha mar deus poan var ho speret,
Certen e viot delivret.

Va c'halon so e captivite,
C'houi ell e denna ac'hane :

Netra tout deoc'h na refusin,
Ma accordit ar c'hraç-se dìn.

Judith.

D'ar famin e zint reduiset,
Eva reont goad an anevalet;
Va sicour allen deoc'h presta
Evit donet da resista.

Holofernes.

Princes, cetu-me tout charmet
Dre'n eloqañç eus ho quelet,
Nemeus sonch nemet ac'hanoc'h,
Va oll fiziañç a zo ennoc'h.

A bep hent oc'h eus desarmet
Holofernes, Roue an Egyptet;
Me ro deoc'h graçou souveren,
Commandit c'houi hivisiqen.

Judith.

Ma permetit, dre ho madelez,
E chomìn gant va zervicheres
Da veva hervez va lezen,
Yac'hoc'h calz en em gomporten.

Mont a rìn partout da vale
Dre ar vro ha dre ar c'hontre :
Mar em lezit en liberte,
Me a bedo bepret Doue.

Holofernes.

Princes, n'oc'h eus nemet pourmen,

En em gunduit hervez ho lezen;
It da vale dre va arme,
Me ho recommando deze.

Nep rai droug dêc'h, m'o funisso,
Rac zouden ez int d'ar maro
Nep a guemero effronteri
E nep fêçon d'oc'h insulti.

Deut da velet va zenzoriou,
Va aour ha va oll finançou;
Dec'h-u int, mar qiril ivez,
Ma ne senchit a volontez.

Me ya da dressa ur reget,
Ma valeot elec'h ma qeret;
Mont a ràn d'ho recommani,
Ma teui va fobl d'oc'h enori.

Vagao, prepar eur banquet
Evit ma teuo d'am guelet
Ar pennou bras eus va arme,
C'hoant bras a meus da gomz oute.

Me a esper dre da gaqet
Judith a dle beza charmet :
Qê buan da laret dezi
Dont fennos da goannia d'am zy.

Vagao.

Princes, c'houi oc'h eus gounezet
Graç vad ar Roue assuret;
Betec bremâ oc'h eus guelet
An amitie en deus bepret.

Dec'h ne refuso netra james,
Var e zanves oc'h ar vestres;
Digasset on d'ho suplia
Da zont fennos dy da goania.

Judith.

Autrou, me voar em c'hemerit,
Dreist va enor ha va merit;
Mont a ràn ganêc'h assambles.
Da veza d'ho Mestr servicheres.

Un enor bras ê memes din
Servicha ur Mestr so qer din;
Ur Roue qen douç, qer charmant,
Quer puissant ha qer vaillant.

Judith da Holofernes.

Prinç, va Mestr, na veritàn qet
Beza ous ho taul recevet;
Mes sclêr e velàn ho calon
Leun evidòn a affection.

Hep complimant ec'h azezàn,
En ho qichen sur e tostàn,
Evit contanti ho speret,
Ha renta d'an oll jaoüstet.

Holofernes.

Plijadur bras a guemeràn
Ous ho quelet em c'hichen bremàn,
A c'hraçou bras em oblijet,
Va c'halon ze rejouisset.

Dibrit, evit, hervez ho cout,
Me servich deoc'h a bep tra tout;
Rac me hac ar gompagnunes
A zo charmet ganeoc'h, Princes.

Arabat eo ober compliment,
En ur fest so qen excelant;
Yac'h, dispos, dibrit hac evit,
Evit sur erfin e sonjit.

Judith.

Va frinç, va Autrou, accordit din
Ar c'hraç na davin qet ho cuin
En ur fest a so qen charmant,
Qen caer ha qen rejouissant.

Holofernes.

Me ya da eva d'ho yec'het
Assambles gant va mignonet;
Gant joa vras ha rejouissanç,
Ravisset omp en assuranç.

Judith.

Vagao, an amzer so deuet,
Poent eo cass ho mestr da gousqet:
Goloit-èn gant e lincelliou,
Hac hon lezit amâ hon daou.

Roit din ar c'hraç, va Doue,
Hac an nerz d'am breac'h ive,
M'ellin gant ur goutelacen
Dont da drêc'hi d'ar monstr e benn.

Evelse o pedi Doue,
Judith o tostet oc'h e vele,
Gant un tol he deus dibennet
Ar monstr evel ur miliguet.

Servicheres, tosta amâ,
Ne c'heus affer mui da grenna :
Dal ar penn-mâ evit cuzet,
Lezomp ar prinç-mâ da gousquet :

Doue ra vezo trugerequet,
'Ar vech-mâ e zomp delivret ;
Partia ellomp hep spont ebet,
Ar passach zo deomp permetet.

Va breudeur, deomp-ni digoret :
Doue en deus hon delivret.
Admiromp eta e vertus
Eus ur Brinces qen courajus.

Doue en deveus permetet
Dre zorn ur plac'h dister meurbet
Dont da zibenna ur geant
A sonje beza oll-buissant.

Doue dre e zaouarn puissant
En deus gret din beza contant :
Holofernes so bet lazet :
Cetu ama e benn da velet.

Evit e test e c'halvàn an ên,
Oun sortiet pur ac'hane ;
Va AEl-mad en deus va miret
Qen pur vel ma zoan antreet.

Gant soign en deus va c'hunduct,
Injur ebet n'ameus souffret;
Rentomp dezàn hon enoriou,
Gloar ha pep seurt meuleudiou.

Judith.

Alchior, ha te a ene
Penn Holofernes ar Roue?
Cetu-èn aze o tiouada,
Hag e corf commancet da vreina:

Alchior, en em c'hra christen,
Hac en em soumet d'hon lezen,
Na ve c'hoarvout a rae ganes
Evel gant Roue Holofernes.

Alchior.

Judith, a greis va c'halon
Me a gred e Toue guirion;
Me zo prest d'en em soumeti
Quercoulz ha c'houi d'e adori.

Me gred e Doue eternal
Hac èn ar mestr universel :
Contant oun da veza christen,
Joa bras a meus ous e lezen.

Judith.

Deomp var an enemiet,
Ma vo ar victor achuet,
Cousqet int oll bremâ dija,
Sonit an drompill d'o difuna.

· Greomp seblant d'o c'hombali,
Evit caout leac'h d'o choqi;
Rac pa velint ar gontel-mâ
Leun a c'hoad, e teuint da sponta.

Pa e guelo ar soudardet,
An arme vezo deroutet :
Sonit ar gombat, trompillou,
Ma zai'r soudardet d'o fostou.

Ar Santinal.

Vagao, ît da zifuna
Ar General, contit dezâ
E ranqer bremâ combati
Ous arme a Vethuli.

Lavarit dezân difuna ;
Ar gardou aroc a dosta :
Ne fot nemet e gommandamant
Da livra ur gombat sanglant.

Vagao.

Va C'horonal, pront difunet,
Commanç ar gombat a so prest,
An enemiet so deut varnomp,
Hac a ra goab eus ac'hanomp.

Ema'r maleur so êruet
En nos-mâ sur, va mignonet :
Dibennet eo hor General
Gant Judith, ar plac'h disleal.

Collet omp tout, ret eo tec'het,

Pa zeo hor C'horonal dibennet :
Tec'homp dious Doue Israël,
A ra deomp ur glac'har mortel.

Ar Pontifet hac ar Vêleyen a Vethuli.

Criomp buez hir da Judith,
Hor brinces fur leun a verit,
Ha nerz d'he brec'h victorius,
Pe dre hini Doue zo glorius.

Canit oll gloar Jerusalem,
D'ar brinces Judith, peb christen,
E deus lazet un den cruel,
Evit delivria pobl Israël.

Deomp d'an ilis tout assambles
Da gana canticou neves,
Evit meuli e vajeste
Ha dont da veuli hon Doue.

Offromp hor c'halon da Zoue,
Hor c'horf, hor speret, hon ene,
Pa vezo'r buez finisset,
M'on recevo er joäustet.

FIN.